

307

(129)

Réflexionou Christen
An Effejou Principala
Var lez

Eus a Revolution, Frang

(Convenement ic unum aduersus Deum et aduersus Christum ejus (Ps. 8))

Rimet en Bro-Zaoz

Gant Person Perros hag e gamaradet a exil, er bloa 1795.

Var toz An Communion

(En gontention e conspirer a enez Doue bac ar roue. ibid.)

1. P'eur eta, ô va Doue ! e teuys an termen
Ma velin c'hoas va c'kontre, douar ar Francizien !
Ya c'horf zo pell dioute, mes noz-de va speret,
Gant gement o deus grët din, a zonch enne beurret.
2. ^{Penn} Tri bloaz zo diaja achiu ; ma zon deut da Vro-Zaoz,
Pa zezir salz ar galon, e squizer o c'hortoz :
Mes, herve 'z brud a glevan, labour huaniadi
Am bo c'hoaz, ha manteze bigen Frang na velin.
3. Arzeet var eur garrec, en tal bordic an nod,
Lies a vech an daerou a red gant va diou chod,
O sellat ha me velo ul lestr benac a Frang,
Arru evit annonç din qëlou va delivrang. (1)

(130)

Petra dal din-me pelloch sonjal tiemen ar mör ?

Alas ! en Frang na souffrer na bêlec na pastor. (2)

~~Emgadi~~
Par velam reus ar pec'het hag hini ar muntro,
Ep na fin na chanchamant o tézoli va bro. (3)

Ah ! va maleur va unan a ve nebeud a dra ;

(1). - Le vers et le précédent ont été ajoutés au bas de la p. 129 ; l'encre est plus pâle.

(2). - Le vers et le précédent ont été ajoutés au haut de la p. 130 ; l'encre est plus pâle.

(3). - Le vers et le précédent formaient la str. 3, avec les 2 premiers vers de la strophe numérotée 3.

308

Mes maleur ar gristences, ennes eo a laca
 Da redec var va diou chod ur feuteun a yaerou,
 Pa sonjây en anbandon eus va denvedigou. (1)

5. Da zigama va c'halon, emeus sonjet cana;
 Nemeus grêt nemet esse, bep noten e fayan,
 Rac en eur vro estranjour va zeod stâg ourz va staon,
 Va oll rimou zo chanjet en cantigou a gaon.
5. Truezus eo va doare ha pitoyabl va stao,
 Chasheet eus va c'kontre ha collet va oll vad;
 Mes ar chagrin am devor, eo clêvet a bep tu
 Ar Fé, ar Relijion, en Frans a zo acha.
6. Ne allian get en compren; eur bobl ger graciis,
 Ger poli, gen amiabl, quechal ger vertuizus,
 En gen nebeut a amzer en defe collet creñ
 Peb santimant hag henor... Nan, bûgen n'er gretien.
7. Gent commandaç da damal den, en em gondaonomp oll,
 Rag dibot eo ay hini n'en defe grêt e roll.
 Da denna malheur e vro, darn dre o c'hrimou fall,
 En defot d'en em opes, a rent coupabl darn all. (131)
8. Re a speret zo noazus, pa ve goal implijet;
 Pel zo ar scrijou infam eus ar filozofet
 Contrel d'ar Relijion, ha d'ar Gourarnamant,
 A brezeg'e ar viçou hag an debordamant.
9. An darn-vuyan ay Noblañ n'en deroa gen studi,
 Hag ar gomun ignorant evit en instrui,
 E deroa tud a justiç re experimantet
 En art da liva g'evier ha da billa ar bed.
10. Da c'honit al Labourer eo plantet en e ben
 Na beo deog na cargou, na redavanç da zen;
 Ne rango gen d'ar revolt nemet clêvet en Templ
 An intru eus e frezeg hag o rei ay exempl.

(1).- Cette str. a été ajoutée après coup, dans l'intervalle entre la str. 3 et la primitive str. 4 ; c'est ce qui explique le numérotage de la pièce.

309

- (132) 11. Esqibien fur a vele ar bar-mañ o tostad,
 Mes an incredulité eus o avizou maol
 Ne ra nemet caqetal, an oll a voa gatet:
 Ar gouli a voa daro, ar gor a zo crevet.
12. Var bez ton, ô va Doue ! e canin-me bréman
 Malheuryou, sacrilejou, crimou an heussusan,
 Ne grete den o c'hana nemet an nep o grées.
 ?uc memeus deus o rima e fontan gant ar vez.
13. O mez ! ô confuzion, adversourez ar c'hrim,
 Dibap din comiou pigant, condu bréma va rim;
 Gra d'ar Francizien ruya a divar o direus
 En em sil en ho c'halon, ha ro dë eur guir geuz.
14. Santimanchou a remors, deut en o eneou,
 Hag heb o dizesperi, rac Doue da vigo; (vigo ? vero ?)
 Roit daëlon d'o daoulagat, neuze gant confianç
 Me eseo o gonit, hag a ya da gomang.

(133)

Abrege sus crimou ar Révolution

Genta Poent.

In terra polluerunt tabernaculum nominis tui (var.)
 Dixerunt in corde suo cognatio eorum simul: quiescere faciamus
 omnes dies festos dei a terrâ. psal. 73

15. Ar memes pech a dapas ar bobl hag ar Roue,
 Caout eur Ministre heritiq ha fiout ennàñ re,
 A gouvocas d'ar Stadou, nonpas evel quechal,
 Tud jentil, tud a enor, mes eur vandey, tud fal.
16. Clasq an tu da agita gle ar rouantelez.
 Sicour ar Prinç da laqat ar bobl oll en o ez;
 N'o devoa gen gevridi en guieg'ez an dud,
 Var ar c'hrimou d'a ober e vont secret ha mud.
17. Teir assamble en Paris an eil varlere'h eben,
 Danjerussoc'h d'o contre equet an teir goalen.
 Tud incapabl da c'houarn, mes habil da zeceo,
 Var digare reformi o deus collet o bro.
18. Dispartia ar Roue deus e zujedet vad,

310

~~Ar pastor leus e zenned~~
 Am erc'h eus o grag'ez, ar bugel eus e dad,
 Ar Pastor eus e zenned, ha Doue eus ay oll,
 Dre enon, va brois paour, int commaneet d'o coll.

(134)

19. Fouilla, confisqa mazou, ober goal-driatamant
 D'an Noblanc, d'ar Véleyen, o c'hacu fostamant,
 Degarmi an dud honest, d'an arrestation
 Lass darm all : setu eno uroz ar Gonvanton.
20. Prodig a road o bredeur, gant uy orgouill barbar
 E tioclerjont ar bregel d'an ên ha d'an douar,
 Ha da c'hortoz ar rocen, eo gante dre avang
 Laget dija ar famin en rouantelez Franc.
21. Genlies a Antechrist int siouas, me a gred,
 Dislonget gant ay ifern da hasta fin ar bed.
 D'er gamma a vlasfennou, d'er golo abizer,
 Eur d'rim eo beza houest, os setang, dae mère,
 Hac anfin da ranseri ay trion hac ay auter.
 En tribunal ar bleizi ay oan a berisso.
22. Prononcer eo ay arrêt, formet eo ar c'homplot,
 Ret vo da Louis c'hoez pignat var ar chaffot;
 E grim eo e vadeley; e setang ar maro,
 En tribunal ar bleizi ay oan a berisso. (1)
- ~~Ret vo da Louis c'hoez pignat var ar chaffot;~~
~~En gamala vlasfennou, ob golo a virer~~
~~Hac anfin da ranseri ay trion hac ay Oter.~~
- (135)
23. Deut aroq, tud aveurtet, avancit, judevien,
 Da velet c'hoaz ay Dey just evit e murevien
 Victim eus e vadeley, och ober sacrific
 Eus e vuez precius : marvit Adieu, Louis!....
24. Youde uy torfet ger bras, ar rest eus ar c'hrimou
 A gometer divorce'het, mil a mil a varvo
 Dindan ar falch muntrerez; malheur da biou benac
 A zo en Frang pinvidig, pe nobl, pe christen mad.

(1). - Les 3 derniers vers ont été ajoutés au bas de la p. 134 (encre plus pâle), pour remplacer les 3 vers du haut de la p. 135 qui ont été barrés.

311

25. Pourmey a rer dre 'n c'hantion instrument ar maro,
 Da zibenna Francizien ; gar a neb a garo .
 En hanoc'h Liberte', partout en o forcer ,
 Pe da vernel er brazel , pe da vernel er gér .
- (136) 26. Goelet o pije neuze Pastoret venerabl ,
 Grizet gant ar binijen , erret o daouarn sacr ,
 Da lezen an Aiel o renta testeni ;
 Fin e gevont mervel , e her d'o exoci .
27. Nombr a zo a vourevien , cass a rér d'ar maro ,
 Nonpas hini hag hini , mes a vandénajou ,
 Beteg c'hoec'h , feiz-cant Béleg en Paris , de a ve ,
 A vassacrer , balamour ma tifennont ar Fe .
28. N'en deus na form , na proces diarog ar supliç ,
 Peb boureo en e g'ever a vassacr en e c'his :
 Assomi , beuzi , tenna , diffamma a bejou ,
 Hag ar rest , squis o laza , exilet eus o bro .
29. Henor deoc'h , ô va c'hontre ! n'en doin pelloc'h gen truit ,
 Pourvei 'rér Merzerien da Tiliiz Jesus-Christ .
 Plijet gant Doue , outrajet dre genlies a grim ,
 Ho pardoni en faveur genlies a victim .
- (137) 30. O Merzerien jenerus ! me meus avi ourzoc'h !
 Perac nemeus an henor da vernel eveldoc'h !
 En draonyen - ma a c'hlac'h ar , peg'eit e chomin - me ?
 Hag eus prizon ar c'horf - mân , peur e vin - me pare ?
31. Ma na rér din gouliou evit scuilla va goad ,
 Mén en chencho en daerou ha dre va zaoulagad ,
 Evit va merzerenti me gare e scuilla ,
 Ha calmi coler Doue dre al lom diveza .
32. O Religioz adorabl a Jesus va Doue !
 O tron meurbet venerabl a Bourbon , va Roue ,
 Abaoe daourec - cant vloas ma voac'h ganeomp o rén ,
 E rîch consolation ha gloar ar Francizien .
33. Mes tremenet e amzer , a zoujanç , a justiç ,

312

Franc, va bro, n'en dout pelloc'h nemet refuch ar vif,
 Lazet ec'heus da Roue, renonç a res d'ar Fé,
 Er bed oll e tétester da vaximou ha té.

(138)

34. A g'icher, ma sao an esol bete plaq e gousquet,
 An hano sacr a Jesus a zo glorifiect;
 Ne adorer gen Doue nemetañ en Europ,
 Franc e unan zo payen, Franc a zo hugunot.
35. Eur c'hrism eo comz a Zoue, prezeg a zifennner,
 Hini ar sacramantou pelloc'h na recover,
 Exceptet ma heureujer gant eur Municipal,
 Evel ma tisheureujer pa deu eur zorc'hen all.
36. Pilla a rîr ay Iliz, terri imachou sent,
 Bete beyou 're varo, tout e maint var o hent;
 Eur c'haloch epqen zo miret evit soy ay alarm:
 O Doue! rîzon o deus sonit -ân d'ay daou lam.
37. Na grete den en public lavaret e Bater,
 Nag ober sin ar c'christen pe e nén denoncer;
 Rag eur quir Républiquein zo euy den possedet,
 Couea a ra en baryou, pa vel traou benig'et.
38. Evit na vo mui memoar nag a vloa nag a ze,
 Ma c'hamaz, pe ma varvas evitomp Mal Doue,
 Eus grët eur c'halandrier, na el den da entent,
 Neus mij, na de, na sérion, en hano diaq'ent.
39. Ar zul, ay de precius gen ancien hag ar bed,
 Goël consacret ha berzet en hano ay Drindet,
 To substituet dean, evel d'ay oll goelyou,
 Sôbaniteou infam, hanvet ay Decadou.
40. Savet ar yeot en henchou, Siou zo glac'haret,
 N'en deu den en deyou dign, d'ay Tempel, eme 'r Profet;
 Alas! deomp-ni eo gouela ar quir Doue en Franc,
 N'en deus pelloc'h sacrific, nag oter, nag ezang.
41. Mouy'et eo 'goulou el lamp ha disqennet ar Groas,
 En iliz, er Vêrejou, ha var ay henchou bras;

(139)

(140)

Abrojet ay Aziel, na vo prezeg'et gen
Nemet doctrin Lucifer, hanvet Droajou an Den.

42. Var gomz tud meo a grimou e reder d'ay ifern,
Evel pa na ve na corf, naq ene da espern;
Nen deus chomet en dilac'h insolant ar pec'her,
Gum ebet da gometi, na torfet da ober.
43. ... auel simjul zo souezet rac na velont qet c'hoaz
Puniset viziblament sacrilegou gen bras;
Mes ne ve jamez Doue terruploch en coler
Evit pa en attager ha pa na lavar g'er.
44. Dre eur mirac re batant eus justig u Doue,
Amp quezet en nôz téval eus an impiete;
Ha mar digor e galoy da rei c'hoas decomp suport,
E vo red eur mirac all eus e vizericord.
- (141) 45. Pardon, pardon, va Doue, me zoug em ene
Oc'h imach, hag em c'halon u templ d'ho Majeste;
Hénon me rai déc'h bende mil amand a enor,
Pa na gavan d'en ober ay ilizou digor.
46. Na gollit qet, va Doue, en totes ay dud vechant,
Uy niver a Francizien, pere d'o badiant
Zo c'hoaz fidel a galon, hag a vel gant horreur,
Hep gallout en em opos, oll crimou o breudeur.
47. O Convantioy millig'et ! ar vech-mâin me'y assur
Na elles qet mont hirroc'h, barr ec'h eo ar muzur.
Gortos da bunition, na, heus gen da ober,
Doue zo just e receo, avuu en ber amzer.
48. Gra entretant vantézon d'ar boll frenegiet,
Na c'heus lëjet neb abus na c'heussan reformet;
Mar conter ay Aziel etouez an abuziou,
Ganet ar vertu zo viç, hag ar virione gaou.
- (142) 49. Petria reet-u brêman, bêleyen sermantet ?
Condaonet gant ay Iliz, rebutet gant ar bed,
Elêc'h dougen ay armou ha gemeret grag'e,

314

Scoit var boul ho calon, ha retractit ho le.

50. Mes c'houi, pastoret fidel, memes en oc'h exil,
Ho fonctionou divin a vo beurret util,
Pa oc'h libr d'o exerci, e c'honfot bende
Da Zoue servicheryen, d'an Iliz bugale.

51. En santeur ho calon avichou prosternet,
En o goelay o c'houlen ma viot efacet.
Divar al leor a ruez, evel goechal Sant Pol,
Qent ma hae ho tennet niceuy anê da gol.

52. Avichou gant Moyses, divar lein ar mene,
O daouarn ganech goureet e supliet an ên
Da gonservi Israël, da rei derjan victoar
Var an Amalecit, adversouriez, ho gloar.

(143)

53. Mes pa bignit d'an Oter oc'h assur d'a c'houit
Oll graou-mad ho Grouer, dre ar pris infinit
Eus ar victim adorabl, hag ho reget qentañ
Eo dont enon gant Jesus d'en em sacrificia.

54. Courach eto, pastoret, evel de an dihuch
Arruet en arc'h Noe oc'hens caret refuch
En douar ar charite, quechall enez ar zent:
O Doue! roit dê ar fe o devoa diag'ent.

55. Esper a roa dre 'n famin, pe en goelet ar mor
E veljet o perissa qenlies a baster.
Ar Zozon o dig'emer, ha graç d'ar Brovidanç,
Els ezomp na dienes, emaint en assuranc.

56. Oc'h exil en un triomf evité zo chanjet,
Hag ar persecution demeus o zirantet
A zervich da buplia d'an oll nationou,
Ha zanteler o zoctrin, ha corruption o bro.

(144)

57. James ay est benig'et na goll e sclerijen,
Pa guz ebarzh en eur vro e pares en eben;
Ma renouez ar Francidien d'o feurs er Barados,
Eus re-al, gant graç Doue e c'klasco e Bro-Zoz.

Eil Poent.

58. Perac n'en don-me clèvet er c'hostez al d'ar Vanch,
 Pa allan d'ar virione rei brêman e revanch.
 Me grife a voaz huel : Bretonet, mi o supli,
 Disquiert eus ho crimou, me ya d'och instrui.
59. ⁷⁹ Z'git ey o quelin-me o tale hoc'h amzer
 Da zelaou tud etourdi, gant propojou goapaer,
 Och ober o doctoret, hep gout o a,b,c,
 Var eur sujet gen divin evel ma eo ar fe ?
- (145) 60. N'en deus netra da gredi er bed universel,
 Mar de facoz ar gristenach ha gaou an Avel;
 Mar domp tromplet eñ poent-se, eme Sant Cyprian,
 An nep en deus hon tromplet eo Doue e-unan .
61. Confrontit an Avel gant archivou ar bed,
 Burzudou al Lezen cos, scrijou ar profeted,
 Hag e velot entreze un acord gen parfet,
 Ma zeo impossibl douëti na vent oll revelet.
62. Donedig'ez Mab Doue, mission e Ebrestel,
 O deus ent' testeni miraclu qey réel,
 En gen bras nombr, ger patant, ma forçont ar rôzon
 Hag an natur estonet da anzao int guirion.
63. Millionou merzêryen en peb stoad, a bep oad,
 Ha tud ar re savanta o deus scuillet o goad,
 Gent renonç d'ar gristenach, mes, a possuùl eo ze,
 N'o devije nep douetanç eus e zivinite ?
- (146) 64. O doctrin pur ha santel evel Doue memes,
 A dropos deomp da gredi guirioneou dies,
 Ha vertuziou diessoc'h da lagat en pratiqu,
 Da hon natur zo frajil ha d'an den qizidig .
65. Comandi a ra peb mad, difen a ra peb drong.
 Eur bunition efroyabl hag éternel a zoug
 A enep he bugale, mar violent hepken

Eur reach gant disprizang eur poent eus e lezen.

66. Eus an eil peñ d'egile, pa velan tout ar bed
 Gant daourec den heb studi chanchet, convertisset,
 Nonobstant corruption a natur fal an den,
 Piou na vel e voa partout dom Doue eus o rën ?
67. Puissanc ar rouane, otorité ar bed,
 A ell varia, sionas, test ar pez a velet
 Arruet en ho contre, caer zo politica,
 An oll lezennou humen zo sujet da faya. (147)
68. Otorité an Ibiz a vœ vizibl bepren,
 Fidel d'ar memes doctrin, biscoas ne deus roct
 Gourc'hemen pernicius, decizion contrôl,
 Ret eo e ve conduct gant ar Speret-Santel.
69. Abaoue trivach'-cant vla bête 'n heur a vremant,
 Ordinal persecutet, hep cess da driomfa,
 E ra d'e adversourien verifica bende
 Pronostiq an Aviel, ha comyou Mal Doue.
70. Me he gouarn, emezän, an Ibiz va fried,
 E deo evit fondamant ar roc'h hag ar garrec ;
 Oll puissanc an ifern na drec'ho get varni,
 Bete fin an oll amzer, bepred me vo ganti.
71. Roan gollet d'an hugunot, foar inutile e ve
 Esse beuri an Ibiz en goad he bugale ;
 Rac ar goad pur a scuillont eo ar greun hag an ad
 A beuplo c'hoas an douar eus a gristenien vad. (148)
72. Caer en deus an avel fal hag ar mor tourmant,
 Bag Pêr na rai get nofratch, pa deu c'hoas da galmi,
 E goeler gant majesté o prezanté he feñ,
 Evel an col pa zispao demeus eur gouabren.
73. Mes ar pez a gle ober hor brassa nec'hamaont,
 Ar fe collet en eur plac a zistro ralamant,
 Ha ney deo get lavaret e kistrofe en Frang...
 Allas ! triètet oc'h eussi gant re a zisprizang.

74. En pêvar c'horn ar bed-mân eus tud predestinat,
 Derzê gercouly ha dec'h u ar fe zo prometet.
 Misericord un Dous a scuillo en o zoües,
 Elec'h ma vo recevet ha gant mall ha gant frances.
- (149) 75. Ar fe a zo eur gouloù a bournen, dre ar bed
 E sclerijen en eur plaç na fixo get bepred;
 Paouezed eo dañ seudi, siouou, en meur a vro,
 Siouellit, va broïs-paour, na ve aru ho tro.
76. Piou a lavarje deoc'h u, c'hoec'h vla zo tremenat,
 Pa roamp oll ha c'houi ha mén tranquil var hou yalet,
 E vije abars nebeut grët ouzoch ay difen
 Da rea, da gaout memeus ay hano a Gristen.
77. Setu c'houi rentet ennon ha g'ir na leveret;
 Allas! hag a nebludou en em accustumfet
 Da zilezel praticou ar quir Relijion,
 Evit heuill nevantan impi ha direzen.
78. Eur bêleg tōuer benac a lezer c'hoas er vro,
 Da ober e apostol, ha da goll eneo;
 Mes gred evel a garo, scuiza raer gantän:
 Nez a glaz laz a g'i a lavar e vez clair.
- (150) 79. Evit tremen diouzoch, e conter deoc'h sioulig
 Eur veach diazeet da vad ar Republique.
 Ar Relijion adare a deuyo var e c'hi,
 Mes mar doc'h er gredenn-se, oc'h meurbet diaviz.
80. Ar veleyen, hep eil-guech, dindan 'tec'h, pe 'z prizon,
 An ilizou polluet, partout en abandon,
 Ornamant, leorion, cali, n'en deus chomet retria,
 Hag adien d'ar gristenach abars deg vloas ama.
81. Ar mis-ma eo decretet e vo libr an ofis,
 Ar mis all e tenu difen, red eo serri 'n ilis;
 Trei a rid da hep evel jirouetou,
 Heryo sant en aparant, ha varc'hoas dissoulou.
82. N'o c'heus mui a râzon evit oc'h eus a fe;

318

Mar leverer en Paris e vo nôz da greiz-de,
 Pion a grete contesti, touet oc'h eus selaou
 Artizanet ho malheur ha doctoret ar gaou.

83. Gant ar gounstitution e voac'h bet borodet,
 Bremâñ gant ar Republique ema ?y oll arajet.
 Dabord en o contraignet da vont d'an oferen,
 Bremâñ malheur d'an hini a grete e goulen. (151)
84. Gant ho tirantet genta e voac'h schismatiget,
 Gant an eil rum e renget bezza heretiget:
 Bremâñ e rîr déch' renong da hep religioun,
 Ne rân soues ney deus netra ve capabl d'o spouron.
85. En conçianç, va broës, hag én a vœ biscoas
 Euy doctrin gen sacriilech, eur gouarnamant voas,
 Euy tribunal gen indign? na gredan get er fond,
 Ne anavezyan hini var an douar tro rond.
86. Pa glêver ar rebechou hag an impiète,
 Am tömpi, ar grueldet a zo er zabad-se,
 En eur g'ever estonet ma lêz ar Francisiens
 Openlies a zelerat da rei dé al lezen. (152)
87. Dre eur jujamant secret euf] a venjanç an ên,
 Mes hanval d'an nep en deus c'hoas eur c'hrieg a fe,
 E veler e recevont ar memes triètamant
 O deus laget ar re-all da zoufr injustamant.
88. Ar jalouzi, ar massacr, ney deus gen entreze,
 Raïc an eil goal anerval a zevor eg'ile;
 Emaint atao disacord, ha pêb hini d'e dro
 A gass evit bezza mestri e gonsort d'ar maro.
89. Aboc ma maint en Paris, eur vez eo o c'hompreñ,
 Ar faction zo creva a extermin eben;
 Ha caer a zo chanch mestrou, ar bed n'en deo get guell;
 N'en em entêntont pelloch' mug'et en tour Babel.
90. Bet o deus ar frenegi da brometi d'ar bed
 En o rentjent evurus, pa o dije laget

(153) Liberté! Egalité! daou dra gen impossibl
Evel prejudiciabl en qeit a ma vo tud.

91. Sonjal a ran din clêvet un eil guech ar serpent
Evel eus hoy Tard genta ourzoch tout o parlant,
N'o po na mestri, naq otrou; immortel, emezan,
Ha sojant tout e viot mar debrit ar frouez-mân.

92. Guir ingale da Adam, oc'heus credet ractal
Beza ive doueou rentet libr hag egal:
Het gant ar vez da guzat, a vremain e velet
Oc'h en noaz evel Adam eveltan decevet.

93. An nerz, ar vent, ar yec'het, ar madou, ar sqiant,
N'en dint qet distribuet d'an oll egalament.
Ac'hay di, va broës-paour, ho calcul zo manget,
Grec'h ha traon, mestri ha mevel zo recesser er bed.

(154) 94. Refus a rêm'h an homach da Noblang ho contre,
Mes plega 'renquit bremen gant laeron o danve;
Hag ar brassa rapiner a gasser var ar roc'h,
D'an neb en deus ar madou e ve lamet an tog.

95. Un avocat framagon, ur judeo reneet,
Ur marc'hadoù frouet-boutiq, sur c'homis divroet,
Ha gement distoladen zo nevez deut en Franc,

A zo brema otrone; Doue, pebes noblang!

96. An oll gargon zo ganté, an oll maniamant
Eus ho madou, Francidien, hag eus oc'h oll arc'hant;
Darn a zalc'h ha darn a gign, hag entre o daouarn
Al loen oupeñ e groc'hen a lêz c'hoaz e houarn.

97. Clêm a rêm'h var an taillou, michant o poa rêszon;
Mes a c'houi a vel bremen nep diminution,
Nemet en ho pugale, ho trafiq, ho micher
A renquit da zilezel dre ma cresq ho mizer.

98. Paper eo an oll moni, ar c'homers mad na dal,
E frich e chom an douar, ar bevanz a zo ral,
Ho tud lazet er brezel, ar gontant o fill,

320

Hou c'houi na chom ganech' gen nemet daelou da scuill.

99. Margret eo déch' ho creun ha poezet ho para,
Goude destum ho třevat na chom ganech' netra;
Roit ho car hag ho loenêt, pe e her d'o pourzion,
Hou c'hoas mar en em glêmit, divoualit dirag pion.
100. Oc'h ho gerere er parc, oc'h ho gerent nessan,
Ourz oc'h oll devezouryen tolet evez bremän,
A boaz e c'halfac'h fiout en ho prassa mignon,
Bete ho mevel en ti a zo hoc'h espion.
101. O querjen al Liberte! merq a revolterez,
Grefet out divar hini ar Barados Terrestre;
En de ma out bet plantet en bro ar Francisien,
Int deut da vea esclav, hag e maint er chaden.
102. Setu enc ar gonit, o credi tirantet, (156)
En dianvès ar brezel, er g'ér persecutet;
Prometet mad o devoa gent ma vijent achi,
E vije Franç, eur vêred, pe eur parc en bedu.
103. Allas! ar brezel achi na vo get a relach,
Eur gemerq al a zavo qant tuyoc'h a arach,
Pa vo partaji ar priy eus ay injustiçon,
Piou a zonch dec'hui neuze en deo ar profitou?
104. Leveou an duod-jentil ha re ar veleyen
A vo d'an noblañc nevez, ar paour n'en deo esqen;
Tout int deja consumet, a viscoas ema'r gont:
Madoù goad-aquisitêt jamez na blosperont.
105. Eur c'hoas carg'et a laeron ha cernet a beb tu,
An oll en noz var vale, en de oc'h ober hii;
Mes, allas! penos erzel, va Doue, penos pad,
En Franç eus deus a laeron eur rouantelezat!... (157)
106. C'hoas al laeron, evite da veza tud ingrat,
A ra goude ar pillach entreze justic' vad;
Mes en Franç eo otrament, hag an eil laer a gle
Gen a vo an oll egal adlaerez egile.

107. Marcha renget ordinal ha mouga ho tépit,
 Derc'hel d'en em vassaci heb honor na profit;
 Ar c'krog a vo d'ar c'kreva, ha c'houri evit loden
 Pa vo avalet ar pesq, a lipo ar grog'en.

Trede Poent ha Conclusion.

108. Pez differanç va brois, eus an amzer a rén
 Hag an hini voa en Frang femp bloaz zo hemuigen!
 Setù c'houri libr hac egal evel ma veritet,
 Egalament malecuruz, egalamant tromplet.
- (158) 109. Caer hoc'h eus dissimuli ha beza fanfaron,
 Ho speret a zo dies ha bec'het ho calon;
 Dre contraign oé'h citoyen ha nonpas libramant,
 A boan eus mil ac'hanoù, unan a zo content.
110. Va Done, pez dallenter eo hini ar gommun!
 Heuill a ra ar goz falla ha caout outi rancun!
 Dre forz e za d'ar brezel ha gratis e combat,
 Heb goud dre urz pehini, evit piou na perac.
111. Tud variant pe abaf, gementit eur parti,
 Disquet evit piou mervel, evit piou com[bl]ati;
 Ho roue var an douar, hag ho Toue en ên,
 A outrajer dirazoch : piou a venjo ane?
112. Goude ar portret fidèle ameus grët eus a Frang,
 Noc'hous afer gen barner nemet ho constanç,
 Honor ho Religion, droajou ar gurunen,
 Ho Toue hag ho roue noch eus qen da zifén.
- (159) 113. Ha pa o pe mil buez, e blefac'h o livra,
 Gent renong da Jesus-Christ, a varvas d'or prena;
 Sevel a ra bleo va feñ, pa zonjan e vezet
 An diverza christénien a raç ar Vretonet.
114. Ar vugale malervus a zo c'horaz da c'henel,

322

A grío venjant varnoch' gant daeron éternel,
 Da verza serret oute dor ar zilvidig'ez,
 En defot bete 'r maro souten ar gristenes.

115. Mar boc biscoas eur, dever d'ar boll en em zavel,
 Francizien, en em armet, poent eo en em discole;
 Peb christen a zo soudard pa atager ar fe,
 Peb soudard zo oblijet da venji e Roue.
116. An oll zo interessaet, hag ar gaoz so comun,
 Ha na gle den menaji na buez na fortun;
 Ret eo en em delivra, cousto déch' pe gousto,
 Eus adversourien Doue, ha bourevien ho pro.
117. Penos tud civilizet chom ep religion, (160)
 Hep sacrific na pastor, na templ, nag crèzon;
 Squer fall, exempl detestabl, bigen bonheur n'o pe,
 Aon ameus na ve coezet varnoch' mallos Doue.
118. Penos n'en deo ay Drindet na gloar na meleudi,
 Na Jesus adorator, na servicher Mari;
 Gant sin ar religion ne vo merget tel den,
 Couly eo deoc'h ober divore gant an espèç humen.
119. Neuze en gliz d'ay oc'hen pleg'et dinday ar yeo,
 Pe ar mul dinday e zam, nemet d'ay tol ne gleo,
 O quelin da virvigen, ô pebes dismegang!
 Da rugale ay Ilyz, da duud ganet en Franc.
120. Eur gouardis ger coupabl a lagai var ho cont
 Malheur an amzer prenant hag ay hini da zont:
 An histor a raports, ha lec'h vo da gredi,
 E voac'h eus ar Francizien hag ar fang hag al li. (161)
121. O estranha lachete! femp Roue zo armet
 Oll en avis d'o sicour, ha c'hoas e preferet
 Ar mestroniach demeus eur Republique payen,
 Da otorité ho Prince légitim ha christen!
122. Gonit genta, coll goude, caout a rit trec'h parti,
 Goude genlies a victor eo red c'hoas combati.

Rod a fortun a droyo hag e vezot goassa,
Briata're assambles zo dies da starda.

123. Sonjit erfad na estim tud ar Gonvention
Euit netra, er brezel buez deg milion,
Bete ma voint o-uman ar veren ey ho dorn,
O comandi en Paris, c'houi gombato er form.
- (162) 124. T. velfet a, afferon er pare diverza,
Gret redec eur mor daelou, netra gen d'o nulla,
Gant oc'h aour hag oc'h arc'hant e gementfont a, tec'h,
Hag o lessont, va brois, oc'hunyan dindan bech.
125. Allas ! sulvui a vestrou o po, suldiessoc'h
Eo conservi en eur vro ar justic, hag ar pesc'h,
Sulvui da dremen oute, sulvui a zibaignou,
Sulnebeutoc'h a acord, sulvuois'h a grimou.
126. A dal ar gomançamant lennet betec ar fin,
Gement crim zo cometet, gement torfet indign ;
En amzer ar rouane, epad mil vla diochtu,
Ar Republique en tri bloa e deus grët deg goech mu.
127. Troit feillen, sellit ho pro en e fleur, en e gloar,
Dindan an oll Bourbonet, a dal Henry-Tavar,
Betec e vab biana ar Merzer oc'h eus grët,
Ar sujet eus hoy daerou hag a rebech ar bed.
- (163) 128. Er bed oll ec'h admiret oc'h humor doug ha gai,
Ho comerç, hoc'h abondanç, hag ho prosperité ;
Ne vœ biscoas er bed-mañ evrussoc'h nation,
Bete an deiz millig'et eus ar rebellion.
129. Va brois paour, eur voyen zo c'hoas da repari
Hoc'h avantachou collet, hep dale, m'o supli,
Antrœit ey ho tever, retornit da Roue,
Hag implijit hoc'h armou ey servich ar Roue.
130. Hag o pe dre ali fal grët nep sort prejudic
D'an Noblang ey ho madou, pe d'an dud a l'lis,
Prest int oll d'o pardoni, pa vo ar Roue mestre,

324

Graç Done hag an amzer a reparo ar rest.

131. Massaci tued eus o bro, hep na rim na rézon,
Eo micher hugunodet eus an Gouenantion,
Ober vad hag excusi ar boll paour egaret,
Eo maxim an Aiel, dever ar Bourbonet.
132. Francien, querent, breudeur ha christenien omp oll, (164)
Goell eo distrei diveat evit mont creñ da goll;
Ha mervel ive memes, mar deo necesser zo,
Gant g'iton ar fourdiliz, ha pavillon ar fe.
133. Bigen, anez eur Roue, Franc na vez en repos,
Anez ar fe catoliq birvigen barados.
Malheur éta d'an deg lach a drakis e roue,
Brassoc'h malheur d'ar c'risten a renonç d'e Roue.
134. O Louis ! va Roue yaouang, an nopla crouadur
Eus a raç ar rouane, pebeus displijadur
A meus-me eus o coellet er prizon o vouela,
E renq ar grimalet, a boan oc'h eus deg vla.
135. Ho taed paour hag ho mam g'er, ho moereb vertus,
Eo deus hoch huanadou ar sujet lamentus;
Collet o deus o bueg hag o lezet minor,
Ar Brovidanç e-huanan a vo ho curator.
136. Sec'hit o taerou, va mestri, ha finissit ho caon, (165)
Ni varvo, pe heb dale ho tirantet ous traon
A zerricho da scabel déch da vont var an tron,
Da ober rën ar justic hag ar Relijion.
137. Alon, Bretonet vaillant, redit oll d'ar Vandee,
Ar Relijion zo êno curunet a lore;
Eman ganti ar victor pel zo deus o gervel,
En euy dorm ar vaz-royal, en al an Aiel.
138. Gement evit devis Done hag ar Roue,
Da zaou dra ger precius conformit ho fue;
Bevit en doujant ar mestri, pa zifennit e gos,
Trist eo gonit ar victor ha coll ar barados.

139. Da zifén henor ay trion ha gloer ay otériou
 Marchit oll gant confianç ; ay hugunot d'e dro
 A velfot leun a spouron o comeret ay tec'h,
 Pe ar remors er galon eus en em renta dech.

(166)

140. Fin eur zoudard hugunot eo e zaonation,
 Lazet eo en e bec'het haq en e drakizon;
 Mes c'houi memes o verval a vo victorius,
 -- accompagñ assureret, ho maro precius.

141. O Doue ay armeou , hon otron souveren,
 Heb asistâng pehini e combater en vén,
 Roit ho pennos d' hon armou , soutenit hoc'h iliz,
 Ha conservit var ay trion heritour Sant-Louis.

142. Grit santout ho puissanc da adversour ho cloar,
 En ho prezang , mar qirit , e fonto evel.coar ;
 Grit santout ho madelez da rugale rebel,
 Grit dezo c'hoaz o carout, laquit fin d'ar brezel.

143. O douar a Kreiz-Izel ! o bro gen deziret !
 Portion ger precius , dénsvet abandonet ,
 Avanç a ra va blayou , eur chang , mar o goelan ,
 Mes mervel a rin contant , mam be ar mennat.main :

(167)

144. Franc a zo c'hoaz catôliq , ay templou digoret ,
 Ar bobl a red d'ay iliz , rentet eo 'n pastoret ;
 Na glèvan a beb costé nemet cantig a joa ,
 Am Te Deum laudamus , Vive,vive le Roi !...

145. Benig'et a vo ay heur m'am be eur sort qêlou ,
 Disposit , ô va Doue ! neuze eus va deyou ;
 N'am bo get irroch beach da vont d'ar barados ,
 Pe me yel dre Kreiz-Izel , pe me yel dre Vio-Zog .

Fin

(Vol. II, p. 129 - 167.)
 145 st. numérotées.